

Daou-ugent aozadur DAO



Tro-dro da Yann-Bêr Thomin, e-karg eus ar politikerzh yezh e Kuzul-rannvro Breizh, emañ un darn eus dileuridi an aozadurioù kelenn emezelet d'ar gevredigezh DAO.

D'ar Sadorn 2 a viz C'hwevrer e oa bet aozet emvod meur DAO (Deskiñ d'An Oadourien) en Alre. Bodañ a ra ar gengevredigezh-se un daou-ugent aozadur bennak a bled gant ar c'helell brezhoneg d'an dud deuet. Sed amañ stad an traoù gant Frederig Ollivier, karget a ziorren e DAO.

Petra eo sell DAO war stad ar c'helell brezhoneg d'an dud deuet ?

Kreskiñ a ra en-dro niver an dud o teskiñ el liveoù kentañ. Re izel e chom memes tra (tro 3000 den). Kalonekaüs eo sikour ar Rannvro evit pezh a sell ouzh ar stumma-durioù hir.

Peseurt binvioù zo bet savet gant DAO abaoe daou vloaz ?

Al levrig embriziañ : aezetoc'h eo d'an dud gwelet o live ha simploc'h d'an aozadurioù a ginnig stajoù da lec'hiañ an dud. Ul lec'hienn internet zo gant DAO ivez. Aes eo kavout warni an holl ditouroù zo ezhomm evit deskiñ brezhoneg (lec'hioù, deiziadoù staj, hentennoù...). Un eil lec'hienn zo gant poelladennoù. Un doare evit an dud da bleustriñ, deskiñ gerioù, klask mont war-raok. Gant DAO eo bet urzhiet ar briziadenn ivez. Ar pal zo tal-

voudekaat barregezhioù an dud (evite hag evit un danvez-implijer), reiñ kalon dezhe, kendrec'hiñ anezhe da chom betek fin ar bloavezh-skol, ha da zistreiñ ar bloaz goude. Aet eo Dao war-raok ivez gant micherelaat ar stummadurioù hag al label kelenner d'an dud deuet.

Petra a zo war ar stern evit 2008 ?

Savet e vo teir friziadenn evit tri live dis-heñvel. Unan a oa bet aozet hepken e 2007. Kinniget e vo dafar o klotañ gant ar barregezhioù meneget el levrig embriziañ. Mont a raïmp war-raok ivez gant termeniñ programmoù pep bloavezh kentelioùnoz. Fellout a ra deomp ivez sevel ul levrig o kinnig an holl stajoù-hañv (kentoc'h e 2009). Ha sevel ur gelaouenn Internet (doare Bremaik) gant pennadoù a-ratozh evit an deskidi (renket dre live A1, A2 pe me oar-me gant ur c'heriaoueg bewech).

Stummadur uhel gant Stumdi

Ur staj mod-nevez a vo kinniget gant Stumdi adalek ar 1^{añ} a viz Gwengolo 2008. Lakaat brezhonegerien (implijidi, tud dilabour, tud all) da vezañ en o bleud da vat gant ar yezh dre gomz ha dre skrid, sed amañ ar pal.

Studiet eo bet ar raktres gant Stumdi, e-pad ar bloavezh 2007. Aozet e vo neuze etre miz Gwengolo ha fin miz Du e Plañvour hag e Landerne ivez ma vez kalz a dud enskrivet. Fellout a ra da Stumdi dedennañ tud a bep seurt : an implijidi a ra gant ar brezhoneg war o zachenn labour (kelennerien, kazetennerien...) hag o deus c'hoant da zanaat o anaoudegezh eus ar yezh. Pe an dud dilabour o deus c'hoant da wellaat o live yezh a-benn kavout ur post-labour divyezhek. Pe an neb a garfe tapout ul live uheloc'h e brezhoneg.

Ar stummadur uhel-se a vo neuze ur staj "ober gant ar yezh" stank-ha-stank, dre soubidigezh, gant strolladoù etre 6 ha 10 den. Stummerien Stumdi a gaso ar prantadoù kelenn war-raok, gant tud eus an diavaez : kelennerien skolioù-meur en o zouez, evit stalioù ispisial hag evit prezegennoù.

Evit gouenn ur follenn enskrivañ :
Stumdi, BP 311, 29800 Landerne. Pgz : 02 98 21 39 94.
Postel : bzh.stumdi@wanadoo.fr.
Skoazelloù arc'hant liesseurt a c'hello bezañ kinniget hervez statud sokial an danvez-stajidi.

Evit gouzout hiroc'h :

Ti ar Vro, 29270 KARAEZ. Pgz : 02 98 99 94 24. Lec'hienn : www.dao-bzh.org. Postel : dao.breizh@wanadoo.fr.